

- SANT SEBASTIAN -

O MERZER KA LO-NEK, HOR SKOUER HAG HOR SI KOUR, KALET
 E HOR BU-HE HA GWAL START HOR LA-BOUR; DI-RAK OCH DAOU-
 LI-NET, NI LAR D'OC'H HON ANKEN, HASTIT D'HON DI-FENN.
 1-SANT SEBASTIAN ZO GANET PELL DIOUZ BRO BREIZ I-ZEL, E GERENT OA
 TUD CHENTIL HA DA ZOUÉ FI-DEL. E KALON HE C'HROUA DU RIG E VAM LA-
 KAS A-BRED GANT DOUJANS VIT HON SALVER, C'HOANT DE GAROUT BE-PRET

2

Yaouank flamm ne glaske bout nemet eur soudard mad
 An impalaer e choajas ; hag e kreiz ar stourmad
 Biskoaz ne oa bet gwelet eur c'hadour ken dispont,
 Ha ne vern eneb da biou bepred oa prest da vont.

3

Mes eur brezel skrijusoc'h eneb d'ar gristenien
 Lake o gwad da redek, 'giz da dorfetourien.
 Sebastlan o sikoure e kreiz o zrubulhiou
 Hag a rae d'e nerz-kalon da c'houzanv o foenion

4

An impalaer e kounar o gout e oa kristen,
 E c'hoatv kentis d'e balez d'ober d'ean eur c'houlenn
 Klac'hi dirak oun ho fe ha c'houi vo ma mignon ;
 Kinnigit d'hon doueou eur bedenn a galon. >>

5

Prest oun, eme Sebastian, da rei d'oc'h ma buhe
 - Da zifenn ho kurunenn, da vervel hebdale
 - Evit ma chomsec'h bepred yac'h ha krenv hag eurus
 - Mes birviken n'ho nac'hin o va Salver Jêsus.